

UR POL SEVENADUREL E ROSTRENN

# EMGAV E GARAJ DURO !

● **À LIRE**  
en breton  
et gallo sur  
cotesdarmor.fr/  
mag203



E kreizig-kreiz Rostrenn zo ur fasadenn sked-disked hag a zegas sklêrijenn e straed Ollivier-Perrin abaoe 2020. Ar freskenn livet-se zo bet graet gant ar c'henstroll Street art sans frontière evel un arouez evit al lañs nevez er Garaj Duro. Ul lec'h kaer da reneveziñ e oa p'he doa divizet ar gevredigezh Ar Fiselerezh pleal gant ar glaouestre-se abalamour da sevel ul lec'h nevez ha digor d'an holl evit ar vuhez sevenadurel.

**D**igeriñ ul lec'h sevenadurel e Rostrenn ? « *N'eo ket nevez an afer, ouzhpenn 15 vloaz zo e oamp o sonjal enni. Deuet e oa war-wel pa oa bet gwelet ne oa ket trawalc'h a ostilhoù evit skignañ an arvestoù bev e Kreiz-Breizh, hini ebet memes* », eme Gireg Milot, kenurzhier er Fiselerezh abaoe 13 vloaz.

Ar Fiselerezh a gas obererezhioù e-maez ar mogerioù, asambles gant frammoù sevenadurel all evel Ar Stal Vras e Langoned (56) hag an Erer Kozh e Karaez (29), ha faotañ a rae dezhi kinnig ur programm bloaziek evit ober anaoudegezh gant modoù arzel all ha reiñ lañs d'ar c'hrouiñ war dachenn ar sonerezh. Emañ e-sell ivez da skoulmañ liammoù solutoc'h etre ar pleustroù a-youlvat hag ar pleustroù micherel, da aozañ mareoù evit lakaat tud a bep seurt d'ober anaoudegezh an eil re gant ar re all dre oberoù boutin, da genlodenniñ an nerzhioù ha da greñvaat al lañs hag ar galloud skignañ a vez gant ar sevenadur er Vro Fisel, dreist-holl gant an dañs hag ar brezhoneg.

## LAKAAT AR VRO DA VEVAÑ

Ar gevredigezh he doa bet digarez, e 2020, da brenañ ar garaj Duro, a oa brudet mat e-mesk ar re gozh evit ar balioù a veze graet ennañ goude ar brezel. An anv-se zo a orin eus Groñvel, lec'h ma oa kalzik sonerien treujenn-gaol, ha brudet mat eo ivez e bed ar sonerezh hengounel e Kreiz-Breizh. Stumm al lec'h zo eus ar c'hentañ, n'emañ ket pell diouzh kreiz-kêr ha kustum eo an dud ac'hann da welet anezhañ war ar pemdez. Divizet e oa bet da neuze reiñ un neuz

**GOUZOUT  
HIROC'H**  
garajduro.org

Krog e vo gant ar mare sevenadurel e Garaj Duro en diskaramzer



ANGÉLIQUE DECOCK

nevez d'ar Garaj Duro, dezhañ da zont da vezañ ur pol sevenadurel evit ar skignañ arzel, ur studio d'an amateurezh hag amateurienn da bleustriñ, ul lec'h d'an dud a vicher d'ober chomadenoù arzel hag ul lec'h kenlabour evit rouedad stank ar c'hevredigezhioù.

Lidet e oa bet digoradur ar Garaj Duro d'an 3 ha 4 a viz Here 2025, goude 2 vloavezh labourioù kempenn evit staliañ un doenn nevez, arc'hantaouet gant ur milion a eurioù eus perzh fontoù europat, hag echuet gras da labour tud ar vro da-geñver chanterioù perzhiañ. Rannet eo etre daou, gant ul lodenn evit stokañ dafar ar festival Fisel, hag a vez implijet ivez gant kevredigezhioù ha frammoù sevenadurel all er vro, hag un eil lodenn enni ur sal sonadegoù hag al lec'hioù evit degemer an holl dud. « *Taolet zo bet evezh-bras evit difuiñ al lec'h diouzh an trouz hag ar renevesiñ termek, gant danvesioù a orin bio, boutelloù plouz da skouer. A-hend-all zo bet 300 000 euro digant Kumuniezh-kumunioù Kreiz-Breizh, Rannvro Breizh, Kreizenn vroadel*

*ar sonerezh hag un arc'hantaouiñ a-stroll keodedel, evit staliañ ostilhoù* », eme Gireg Milot. A-benn ar fin e vo kempennet an estaj evit staliañ burevioù ha kempenn lojeizoù evit an arzourien.

## « UN LIEU DE VIE ASSOCIATIF ET CULTUREL LOCAL »

Ul lec'h engouestlet evit gwir eo, koulz war-fet an dibaboù programmiñ, hag a ro ur plas a-feson d'ar merc'hed arzourezed, ha war-fet ar mod ma vez meret a zo troet war an diorren padus.

(Ad)kregiñ a ra istor ar Garaj Duro, evit tud ar c'horn-bro hag asambles gante ! ●

Angélique Decock

\* Le garaj Duro a également reçu un soutien financier du Conseil départemental